

KANTIK DA ZANTEZ CHRISTINA

VAR TON : *D'hor Mam Santez Anna.*

DISKAN :

Henor d'hor Patronez,
Guerc'hez ha Merzerez ;
Roet e deus da Zoue
Yaouankik he bue.

I

Guelomp en he bue
An ners a ro Doue
Da viret he lezen
Da nep a zo kristen.

II

Christina, merc'h Urban,
C'hoas craouadur bian,
E deus evit he feiz
Da c'houzanv poaniou kris.

III

Ne doa nemet dec vloas
Pa reas-eun distruij bras
Deus he oll idolou
A lakas a dammou.

IV

An tammou arc'hant, aour,
A roas neuze d'ar paour ;
Rac dre ar voyen-se
E servichent Doue.

V

Mes he zad e kounnar
He bressas d'an douar :
Ha gant an taoliou fouet
He c'horf oa dispennet.

VI

He fulor a gresk c'hoas,
Hé verc'h zo laouen bras :
Christina, en he foan,
A c'hoarze ous Urban.

VII

Ar vez en he galon,
E zôl en eur prison,
Karget a chadennou
A brevet he memprou.

VIII

Ouz eur rod oa staget,
Ha tân dindan c'hoezet ;
Mes tân hag eol bervet
Drouc dezhi ne reont ket.

IX

Kalz eus ar bayonet
Oa eno diredet ;
An tân e espernas.
A gantchou ho dévas.

X

Etretant gouseoude,
Eun Eal, a bers Doue
A ro d'ar Verzerez
Eur vue, eun ners nevez.

XI

Mes an tad dinatur,
Bourreo he graouadur,
A stag out-hi eur men,
Hag e stlap en eul lenn.

XII

Prestik var bord al lenn,
Edo r verc'hik kristen,
Laouen ha trankil bras
Ken yach'evel biskoas.

XIII

Hag an tirant cruel,
Treac'h dezhan he vugel,
A deu, en he arraj,
Da verval var ar plac.

XIV

Ar gouarner nevez
A reas d'ar Gristenez
Souffr kement a boan
Vel en doa gret Urban.

XV

Stag dezhi he daouarn,
En eur guele houarn.
He c'horf zo astennet
Var pek hag eol bervet.

XVI

Mes dre sin ar groas,
An-tân-ze a vougas ;
Ma oa 'vel eur bugel
Contant ed he gavel.

XVII

E c'hass a reont neuse
Betec templ ho Doue
'Vit lakat anezhi
Da zont d'en adori.

XVIII

Ar C'hraouadur Kristen
Ne gonsantje biken :
Guell eo gauthi mervel
Ha d'he feiz chom fidel.

XIX

An histor en lavar,
Kerkent oa d'an douar
Ar fos-doue kouezet,
Hag an tyrant marvet.

XX

Daou vourreo zo skuizet,
Ho daou e zint marvet :
Eun ali d'ar plac'hik krenn
A ra he c'hurunen.

XXI

Eur forn a zo goret,
Hag en-hi eo tolet ;
Pemp devez, eb poan,
E chom e kreis an tân.

XXII

Kana ra deiz ha noz
Da Zoue mil bennoz,
Mes, siouas ? peb lavar
Ho laka en egar.

XXIII

Troc'hi he zeod dezhi
A zo c'hoant peb hini ;
Dre urs ar gouarner
Eo gret e berr-amzer.

XXIV

Mes, ô brassa burzud !
Ne oa ket rentet mud :
He mouez a oa sklerroch,
He c'homzou nerzussoch.

XXV

Ous eur peul eo staget,
A dennou bir lazet.
Christina, Merzerez,
Efirus oc'h da james.

XXVI

Kristenien, eur skuer eo
Evit ar re zo beo ;
E peb oad, e peb stad,
Doue a zo hon Tad.

XXVII

Ret eo karet Doue
Epad an holl vue :
Abred ha divezad
Hor bo ato stourmad.

XXVIII

O velet Christina
N'or beus ket da grenna
Doue d'ar re zister
Ro sikour en danjer.

XXIX

Deiz Gouel hor Patronez,
Gouleñnomp assamblez,
Ma pedo evidomp,
Ma roi sikour deomp.

Y.-M.-Fogot

SERRÉ,

v. g.

Quimper, 17 Mai 1885.